

Iliz Sizun nevez-kempennet.

KANTIK

I

Guechall, kristenien Sizun, evit diskoues ho feiz,
 Enn enor da Sant Sulio a zavas eun iliz,
 Eun iliz ker pinvidik, ma n'oa na tost na pell,
 Labour kaeroc'h evithi var douar Breiz-Izel.

II

Ann amzer, dre ma tremen, a gass ganthan peb tra,
 Treac'h eo d'ann houarn nerzus ha d'ann dir kaleta :
 An den hag e labourou a ia gant an amzer....
 Tri c'hant vloas var eun iliz n'int ket eur beac'h dister.

III

Gouskoude kaer o pezo kantvejou didruez,
 Uza reoc'h oc'h oll gounnar var feiz tud ar menez :
 Keit ma vo mein er vengleuz hag er c'hoajou dero
 Ne jomo ket dirapar iliz koz Sant Sulio.

IV

Rei aluzen d'or Patron ha d'ann Autrou Doue
 A dal muioc'h evidomp eget prena leve ;
 Bag Doue ha Sant Sulio a zalc'h enn env lojeiz
 D'ann dud vad o deuz poaniet da gempenn ho iliz.

V

Nag hi zo kaër adarre hon iliz benighet !
Ne skuiz ket hon daoulagad o sellet, o velet. . . .
Noas oa evel eur vezen epad ar misiou du ;
Savet euz varnhi bleuniou, bleuniou koant a bep tu.

VI

Laosket e deuz da goëza an truillou e guiske,
Ne deus mui plastr divalo ledet var e zae :
Oll gened ar iaouankis a gav enn e c'hosni
Hag e skeud e mogeriou dous eo breman pedi.

VII

Ar mein-ze ker flam hirio n'int ket mud, kristenien,
Meuli a reont o caloun ha nerz oc'h aluzen ;
Lavaret a reont ive : Mez e ve did, pec'her
Dont gant eun ene udur enn eun iliz ken kaer.

VIII

Kals o peuz great va Breudeur, Breudeur, grit eun dra c'hoas
Evit plijout d'or Zalver ha mervel enn he c'hras :
Jesus enn e ilizou a gar ar braoentez
Ar pez a c'houlen dreist-oll eo kaout ho karantez.

PERMIS D'IMPRIMER,

Quimper le 9 Novembre 1875.

F. JÉGOU,

Vic. Gén.